

Estez miz Mezheven 2009

## Diplom Broadel ar Brevet

# RUMMAD AR SKOLAJOU

### Amprouenn

## Istor - Geografiezh Deskadurezh ar geodedourien

2 eurvezh

Ar sujed-mañ zo 9 fajenn anezhañ :

- Lodenn gentañ, istor ha geografiezh, notet war 18 poent :

DA CHOAZ

- ar sujed 1 niverennet eus ar bajenn 2/9 d'an hini 3/9
- ar sujed 2 niverennet eus ar bajenn 4/9 d'an hini 6/9

- Eil lodenn, deskadurezh ar geodedourien, notet war 12 poent :

- ar sujed niverennet eus 7/9 da 8/9

- Trede lodenn, kavout e verkoù en amzer ha war an douar, notet war 6 poent :

- ar sujed niverennet 9/9 (da reiñ en-dro gant ho kopienn)

Barregezh skrivañ (reizhskrivadur ha doare d'en em zisplegañ) : 4 foent

Code examen : 9DNBCH1	Diplôme National du Brevet	Série Collège	Sujet	S 2009	- 1/9 -
-----------------------	----------------------------	---------------	-------	--------	---------

## **KENTAÑ LODENN : ISTOR HA GEOGRAFIEZH (18 poent)**

### **SUJED N<sup>o</sup>1 – ISTOR : CHEÑCHAMANTOUÛ KEVREDIGEZH FRAÑS ETRE 1945 HA 1975**

#### **Diell 1 – Ur micherour gall o 'n em gavout er gevredigezh veveziñ<sup>1</sup>**

E 1947 e tapas Richard e serfikat<sup>2</sup> da 14 vloaz. En e dri fezh-kegin hep douch na sal-dour, e veve deiz-ha-deiz ar familh Schnell. Gant e CAP alc'hwezer e veze paeet Richard 200 lur ar miz e 1950, 350 lur e 1954. Goude 1958 e tegasas e wreg 350 lur ar miz ouzhpenn d'an tiegezh diwar ober eurioù-labour ouzhpenn. Peadra da breñañ arrebeuri. « Santet em boa bet e oa aet ma stad war wellaat war-dro 1960 », emezañ. Ar bloaz-se e c'honeze 743 lur ar miz ha fest bras gantañ o preñañ e oto gantañ, unan eil dorn, war dle. Ar frigo hag an tele a oa deuet da heul d'ar c'houlz-se ivez. Dont a reas da c'houzout da Richard penaos e c'helle gwellaat e stad un tamm buanoc'h en ur gemer dle. E 1965 e prenas un oto nevez evit tost da dalvoudegezh c'hwec'h miz eus e c'hopr. A-benn 1970 e c'honeze 2200 lur ar miz.

E verc'hed, Martine, ganet e 1958, ha Sandrine, ganet e 1966, a voe ar wezh kentañ dezho mont da vakañsiñ pell er garavanenn paeet 14 000 lur e 1974.

Diwar P.Beaudeau, *Demain, la France*, Hachette pluriel, 1986.

<sup>1</sup>. société de consommation      <sup>2</sup>. certificat d'études


#### **Diell 2 – Emdroadur kevredigezh Frañs e-pad an « Trente Glorieuses »**

	<b>1946</b>	<b>1975</b>
Poblañs hollek (e milionoù)	40,5	52,6
Feur genel (‰)	20,9	14,1
Feur mervel ar vugale (‰)	84,4	13,8
Spi da vevañ ar baotred (e bloavezhioù)	59,9	69
Spi da vevañ ar merc'hed (e bloavezhioù)	65,2	76,9
Tud o chom war ar maez (%)	46,8	31,5
Tud o chom e kêr (%)	53,2	68,5
Dregantad ur rummad oad o tapout ar vachelouriezh	4	24,4
Niver a lojeiz (e milionoù)	12	21

Mammenn : diwar lec'hiennoù an INSEE ([www.insee.fr](http://www.insee.fr)) hag ar Vodadenn vroadel ([www.assemblee-nationale.fr](http://www.assemblee-nationale.fr))

<b>Code examen : 9DNBCH1</b>	<b>Diplôme National du Brevet</b>	<b>Série Collège</b>	<b>Sujet</b>	<b>S 2009</b>	<b>- 2/9 -</b>
------------------------------	-----------------------------------	----------------------	--------------	---------------	----------------

## Diell 3 - Sevel « savadurioù bras<sup>1</sup> » e Sarcelles (Val d'Oise) er bloavezhioù tri-ugent



Mammenn : *Catalogue de ressources documentaires sur le grand ensemble de Sarcelles*,  
Les Publications du Patrimoine en Val de France n°9 – 2007.

<sup>1</sup>. « grands ensembles »

### GOULENNOU - 8 POENT

#### Diell 1 (3 foent)

1. Kavit en destenn anv daou vad beveziñ bet prenet gant ar familh Schnell e-kerzh an « Trente Glorieuses ». Penaos eo deuet ar familh-se da wellaat he stad ?

#### Diell 2 (2 boent)

2. Kavit en daolenn daou dra a ziskouez ez eo gwellaet yec'hed ar Frañsizien.

#### Dielloù 2 ha 3 (3 foent)

3. Skrivit ar pezh a welit war an diell 3 ha kavit, e-barzh an diell 2, daou dra a lavar perak ez eus bet savet « savadurioù bras ».

### PENNAD-ARGUZIÑ - 10 POENT


Diwar an titouroù ho po tennet diouzh an dielloù ha gant ar pezh ho po desket, savit ur pennad-arguziñ un ugent linennad bennak a ziskouezo cheñchamantoù doareoù bevañ ar Frañsizien etre 1945 ha 1975.

Code examen : 9DNBCH1	Diplôme National du Brevet	Série Collège	Sujet	S 2009	- 3/9 -
-----------------------	----------------------------	---------------	-------	--------	---------

**KENTAÑ LODENN : ISTOR HA GEOGRAFIEZH (18 poent)**

**SUJED N<sup>o</sup>2 – GEOGRAFIEZH : KRESK AR C’HÊRIOÙ ER BED**

**Diell 1 – Emdroadur kêrioù bras ar bed**



Diwar M-F.Durand, B.Martin, D.Placidi, M.Törmquist-Chesnier – *Atlas de la mondialisation*, Presses de Sciences PO, 2006.

Code examen : 9DNBCH1	Diplôme National du Brevet	Série Collège	Sujet	S 2009	- 4/9 -
-----------------------	----------------------------	---------------	-------	--------	---------

## Diell 2 – Kudennoù kresk ar c'hêrioù er Su

An hanter eus poblañs ar bed, a zo hiziv war-dro 6,5 miliard a dud, a zo o chom e kêr. Al lodenn vrasañ anezho a vev e kêrioù bras, hag e metropolennoù meur zoken, milionoù a annezidi enno.

An darn vuiañ eus ar c'hêrioù bras-se a zo bremañ e broioù a vez graet re ar Su anezho. Jakarta, São Paulo, Mec'hiko, Mumbai [*Bombay*], Kaero, anvioù kustum deomp hon laka da soñjal e-barzh metropolennoù divent stanket ha saotret e-lec'h ma vev kalz a dud er pezh a anvomp lochennaouegoù<sup>1</sup>.

Kreskiñ a ra kement poblañs kêrioù bras ar Su ma ne vezer ket evit gwellaat an akipamantoù enno ha dreist-holl lakaat anezho diouzh ezhommoù an dud.

Dour mat da evañ, dourioù lous, lastez, hentoù, transportoù boutin, kultur, skolioù, skolioù-meur, an holl akipamantoù-se zo erruet evit al lodenn vrasañ anezho en ur stad truezus ha koustañ a rafe ken ker o gwellaat ma ne zeu ket a-benn politikourion ar vro da gavout arc'hant.

E kêrioù bras-se ar Su emañ an darn vrasañ eus an dud o chom e lochennaouegoù, da lavaret eo, ouzhpenn ur miliard a dud.

Diwar Graeme Villeret, *PopulationData.net*, miz-here 2006.

<sup>1</sup>: bidonvilles

## Diell 3 – Emlad-spas kêrioù an Norzh : ur bannlev tiez e Las Vegas (Stadoù-Unanet), 2007



Source : <http://www.flickr.com/photos/ulybug/58183800/>

Code examen : 9DNBCH1	Diplôme National du Brevet	Série Collège	Sujet	S 2009	- 5/9 -
-----------------------	----------------------------	---------------	-------	--------	---------

**goulennoù - 8 poent**

**Diell 1 (3 foent)**

1. Displegit emdroadur ar c'hêrioù bras er bed etre 1975 ha 2000.

**Dielloù 1 et 2 (3 foent)**

2. E 2015, e peseurt lodenn eus ar bed e vo kavet an darn vrasañ eus ar c'hêrioù bras ?  
Pere eo dilerc'hioù [*conséquences*] kresk ar c'hêrioù war kêrioù ar Su adalek bremañ (diell 2) ?

**Diell 3 (2 boent)**

3. Deskrivit foto Las Vegas en ur bouezañ war an elfennoù a ziskouez emled-spas ur gêr eus an Norzh.

**PENNAD-ARGUZIN - 10 poent**

Diwar an titouroù ho po tennet diouzh an dielloù ha gant ar pezh ho po desket, savit ur pennad-arguzin un ugent linennad bennak a ziskouezo kresk ar c'hêrioù er bed hag e efedoù disheñvel en Norzh hag er Su.

Code examen : 9DNBCH1	Diplôme National du Brevet	Série Collège	Sujet	S 2009	- 6/9 -
-----------------------	----------------------------	---------------	-------	--------	---------

**EIL LODENN : DESKADUREZH AR GEODEDOURIEN (12 poent)**

**SUJED : KENGRED [=solidarité] HA KENLABOUR ETREVROADEL**

**Diell 1 - Solidarités, un aozadur nann-gouarnamantel (ANG), o reiñ lañs d'ur c'hampagn-kelaouiñ evit an dud da gaout dour evabl**

Mammenn : diwar al lec'hienn Internet [www.votregouttedeau.org](http://www.votregouttedeau.org), 2009.

**Diell 2 – Bilañs labour an UNICEF, un ajañs eus an ABU, er Pakistan e 2007**

Un 2,5 milion a dud zo bet tapet fall gant an dic'hlanioù<sup>1</sup> a zo bet nevez 'zo e Su Pakistan, p'en deus Norzh ar vro d'ober c'hoazh diwar ar c'hrenn-douar spontus a oa bet skoet gantañ e Miz Here 2005. Hiziv, goude daou vloaz harp d'an dud o deus gouzañvet an drastadennoù-se, emañ UNICEF Frañs oc'h ober war-dro ar re salv a glask distreiñ d'ar gêr, kement ha sikour anezho da wellaat o buhez.

Diouzhtu tremenet an drastadenn e oa UNICEF Frañs war an dachenn evit ar sikourioù kentañ ret : adsevel tiez e lec'h teltennoù a-benn pledal gant ar glañvourien ha kaout savadurioù-koad skañvoc'h d'oberata.

Prederioù, alioù war ar boueta, koulz ha brudañ doareoù yec'hedusted mat, ha paneve ar skoliata a zo traoù a denn holl d'an diorren war hir dermen, ar pezh a vez aliet gant an UNICEF 60 vloaz 'zo dija.

A-drugarez deoc'h, e Pakistan, UNICEF Frañs a zo deuet a-benn da :

- reiñ 687 000 pezh dilhad tomm d'ar vugale ;
- lakaat 804 200 euro e-barzh ar staliañ pe an adstaliañ hag an dilousañ dour.

Diwar lec'hienn Internet UNICEF Frañs, <http://www.unicef.fr/>

<sup>1</sup>. inondations

Code examen : 9DNBCH1	Diplôme National du Brevet	Série Collège	Sujet	S 2009	- 7/9 -
-----------------------	----------------------------	---------------	-------	--------	---------

### Diell 3 - Karta ar Broadoù unanet, 26 a viz Mezheven 1945

Mellad 1<sup>añ</sup> : Palioù ar Broadoù unanet eo ar re-mañ :

1. Derc'hel ar peoc'h hag ar surentez etrevroadel. (...)
2. Diorren darempredoù a vignoniezh etre ar broadoù. (...)
3. Sevel ar c'henlabour etrevroadel en ur zont a-benn eus kudennoù etrevroadel war an tachennoù ekonomikel, sokial, intelektuel pe humanitaer, en ur ziorren ha brudañ an doujañs da gwirioù Mad-den ha da frankizioù diazez evit pep hini, hep dispartiañ na gouenn, na reizh, na yezh, na relijion.

#### GOULENNOÙ - 4 foent

##### Dielloù 1 ha 2 (2 boent)

1. Pegen tapet fall eo an dud sikouret gant an UNICEF hag an aozadur nann-gouvernamantel *Solidarités* ?
2. Hervez an daou diell-mañ, penaos e c'hell pep hini ac'hanomp kemer perzh er sikour humanitaer ? (daou respont zo gortozet)

##### Diell 2 (1 poent)

3. Roit ur skouer eus ur sikour savet gant an UNICEF war verr dermen hag unan all war hir dermen.

##### Dielloù 1, 2 ha 3 (1 poent)

4. Diouzh pehini eus palioù karta ar Broadoù unanet eo stag an traoù kaset da benn gant an daou aozadur-mañ ?

#### PENNAD-ARGUZIÑ - 8 poent

En ur gemer harp war titouroù an dielloù ha war skouerioù dibabet ganeoc'h, e savoc'h ur pennad-arguziñ ur pemzek linennad bennak a ziskouezo penaos e ra ar c'hengred hag ar c'henlabour etrevroadel evit sikour ar poblañsoù e poan.

Code examen : 9DNBCH1	Diplôme National du Brevet	Série Collège	Sujet	S 2009	- 8/9 -
-----------------------	----------------------------	---------------	-------	--------	---------



# DA REIÑ GANT HO KOPIENN AMPROUENN

## TREDE LODENN : KAVOUT E VERKOÙ EN AMZER HA WAR AN DOUAR (6 poent)

### Goulenn 1 - ISTOR (3 foent)

Skrivit deziad ar penn-kentañ ha hini fin ar prantadoù-mañ :

	Deziad ar penn-kentañ	Deziad ar fin
An eil Impalaeriezh		
Brezel Aljeria		
Ren personel Loeiz XIV		

### Goulenn 2 - GEOGRAFIEZH (1 poent)

Skrivit anvioù an aradennadoù menezioù diskouezet war ar blanisferenn gant al lizherennoù A ha B :

- A : .....
- B : .....

### Goulenn 3 - GEOGRAFIEZH (2 boent)

Skrivit anvioù :

- An dezerzh diskouezet gant al lizherenn C : .....
- Ar meurvor diskouezet gant al lizherenn D : .....
- Ar goadeg stank diskouezet gant al lizherenn E : .....
- Ar vro diskouezet gant al lizherenn F : .....

